

# AN ALAMANED E BREIZH

## Teul 1

Ema ar Jermaned en hor bro, e Breizh.

Perak ?

Rak mah oa staget Breizh doc'h Frañs.

Met en ur zegouezh enni, santet o deus ne oant ket mui àr zouar eneberion. Goût a raent eh oa kendervi Jermaned ha Kelted. Setu perak n'o deus graet droug erbet da zen, na dizalbadet netra. An dismantr a weler en Orient, e Brest, hag e tachadoù lec'h mah oa soudarded pe martoloded, a zo dreist-holl labour ar Frañsizion pe ar Saozon.

Setu ar pezh a zo ret lâret hag adlâret.

Ret eo ivez lâret ema ar Frañsizion hag ar Saozon en deus hor stlejet d'ar brezel hag ema daet ar peoc'h deomp get ar Jermaned.

Trist eo marse hen anzav; èl-se ema neoazh.

Bremañ, gouiompe beviñ didrouz en ul lod gete, keheit ma ray plijadur dezhe chom dre-mañ. Gouiompe en em zerc'hel, evit na vihanay ket an istim o deus evit ar Vretoned, ha ma komprenint mat nend omp ket-ni kablus ag ar pezh a zo arru.

(...) Plijadur hor behe bet é welet ar Frañs é paeiñ deomp, a galon vat, an dle bras he doa e-keñver Breizh.

Re amoet, pe re fall eo bet he mistr evit kompren c'hoantoù milvlezek ar Vretoned.

Re ziwezhat eo bremañ.

Loeiz Herrieu, *Dihunamb*, Gourhelen 1940.

## Teul 2

I. Le Conseil National Breton déclare, au nom du peuple breton, qu'en toute éventualité, la situation de la Bretagne ne pourra plus être celle qu'elle était auparavant. Le système qui condamnait la Bretagne est anéanti à jamais, et tous les principes sur lesquels il était fondé se sont effondrés. Une nouvelle Europe va naître, qui verra s'épanouir la jeune force de la Bretagne, soutenue par nos volontés.(...)

V. Dans la guerre qui se poursuit contre l'hégémonie anglaise, le peuple breton tient à affirmer qu'il est de tout coeur contre le vieil ennemi des Celtes [ar Saozon].

Kuzul Broadel Breizh,  
*Diskleriadenn Pondi*,  
3 a Ourc'helen 1940.

## Teul 3



### Jakob ha Jakob a zo !

A houdé men de embannet el lezenn enep d'ar Iuzevion, é i-ker beh, herve akustumans Bro-Frañs, de jiboesaat er « Frieu kromm » a he leñé bout kuhet emesk en dudigoù izel, épad ma valé didrouz kaer er ré anehé en des argant pé karget uhel.  
Eisé é huél bremañ tud diar er mézeu, Breizh digej a vidad de vidad, éat zrebri pé VI<sup>vet</sup> kantved, kargidi amoet é tonet d'o grachennet en arbenn ma tougant un anv ag ar Skritur Santel ! Stank int é Breizh en tie gehu aher anehé Jakob, David, Abraham, h. h. ha n'en des ne oah un dapenn goed iuzéu en o pahiad.

Bout zo Jakobed, Davided arall de jiboesaat, sesoh de ziforh, muloh a grog énné, hag a viv hoah dré-sé ar goust er gristenion evel al laou ar grohenn ur paour.

Kerhent enta, er hargidi, de glask huen é chaocheu er ré-sé ha lezent hor Jakobed-ni de zezav é peuh o ziadeu bugalé a ouenn geltiek digej.

LAN hag HERVE.

Jakob ha Jakob a zo !

A-c'houde mand eo embannet al lezenn enep d'ar Yuzevion, e lakaer bec'h, hervez akustumañs Bro-Frañs, da jiboesaat ar "Frieu kromm" a c'hellahe bout kuzhet e-mesk an dudigoù izel, e-pad ma vale didrouz-kaer ar re anezhe en deus argant pe kargoù uhel.

Evel-se e wel bremañ tud diàr ar maezoù, Breizh digej a vidad da vidad a zrebri ar V<sup>vet</sup> pe VI<sup>vet</sup> kantved, kargidi amoet é tonet d'o grachenniñ en arbenn ma tougant un anv ag ar Skritur Santel ! Stank int e Breizh an tiegezhioù a raer anezhe Jakob, David, Abraham, h. h. ha n'en deus neoazh un dapenn gwad yuzev en o gwazhiad.

Bout 'zo Jakobed, Davided arall da jiboesaat, aesoc'h da ziforc'h, muioc'h a grog enne, hag a vev c'hoazh dre-se àr goust ar gristenion evel al laou àr groc'henn ur paour.

Kerzhent enta, ar c'hargidi, da glask c'h-wenn e chaochoù ar re-se ha lezent hor Jakobed-ni da zezav o ziadoù bugale a ouenn geltiek digej.

Lan hag Herve  
*La Bretagne*, 1 a C'houreneñv 1942

## Teul 4

Un dra souezhus eo gwelet ar c'has en deus ar Juifed doc'h hon Salver Jezus-Krist. N'eo ket er-walc'h evite en dout er lakaet d'ar marv hag er staget doc'h ar groaz ; em gemer a raont c'hoazh doc'h ar gristenion e zisiplad. Bepred e klaskont gober droug dezhe ; monet a raont mep betak lazhiñ bugaligoù kristen, evit ma c'hellint evet o gwad.

Larboulette,  
*Buhez ar sent*, 1910